

*M. Ollivier - Sup. Chouernival*

neve-amzer, a oa zavet en kreiz kear, hag ann Otrou Augustin David, ken eskop koz, ann Otrou Huard ouz hen heuil, a faraz ann oferen eno, dindan bolz ann Nenv, kement a dud evel ma oa. Ann holl barrojou tro-war-dro, a deuz, d'abardae, d'ar prozision. D'ont a rent da rei enor d'ar Sant neve ha d'hen peñi.

« Piou a oa ar Sant neve ?

« Eur bugel, eur bugel merzer : sant Valentin.

« P'lon mam ar Werc'hez, ann Itron Varia Rostren, e dc'voa hen dibabet, a dol zur, da viret a-unan gant hi. ha c'hoarik hac ar vro a zo tro-war-dro.

« e kreis Kerne evel eur bleun a c'houez vad, pellaet diouz-imp ar peñhed, hag intanet ar c'halonou gant karanté Doue ! »

Ar prozision a reaz ann dro da gear, ha pell-zo na oa bet gwelet kaeroc'h e Rostren.

Ann holl a lare en eur vont war he c'hiz : Da vloa, ma vin bey, me 'zeuio adarre da bardon sant Valentin binnet.

Eur bugelik a c'houlenne digant he vamm :

— Hirie, ma mamm, e oa pardon sant Valentin er baradoz ive ?

— Bemde eve, ma map, hag a vo da viken.

— Oh ! na me garje beza evel-t-han !

Doue da roio d'imp-ni ar c'hraz a c'houlenne ar bugelik.

Evel-ze bezet gret.

## PEDENN DA ZANT ERVOAN

Sant Ervoan pella diouz hon Bro Gizio-neve, fals-kredenno !

Ro d'ar vamm ar c'hras da weled  
He vertuou en he merc'hed.

Ha d'ar tad, sant mad, ro ive  
Doujans Doue ha karante.

D'ar vugale ro, Sant Ervoan,  
Koantidigez ha kalon glan.

Ro d'al labourer trevado  
Ha peuri mad leiz he barko.

D'ar merdead ro mor sioul,  
Avel gear ha nenv digoummoul.

Pa deuo heur hon zremvan  
Ped eviad-omp-ni, sant Ervoan.

Ma larfomp en Nenv 'vouez uhel :  
« Enor da baeron Breiz-Izel ! »

JAFFRENNOU,

*sholaer en skol Saint-Charles.*

## CHOMET EN H3 PRO

— Un sieur C..., Jean-Marie, laboureur a Bégard, a été condamné à 50 fr. d'amende par le tribunal correctionnel de Bégard, pour exercice illégal de la médecine.

**DUAULT.** — Un nommé Le Guillou, Adrien, (67 ans) cultivateur a Dault, a été trouvé pendu dans son écurie.

Depuis quelques mois, Le Guillou, ne jouissait plus de ses facultés intellectuelles et à cause de cela on le surveillait de très près. Malheureusement pendant une absence de sa femme, il trouva moyen de mettre ses projets en exécution.

**LOUARGAT.** — Sapeurs pompiers. — Par décret de M. le Président de la République en date du 13 mai, M. Marzin (Yves-Marie) a été nommé sous-lieutenant commandant la subdivision des sapeurs-pompiers de la commune de Louargat.

**PLOEZAL.** — En correctionnelle. — Deux ménagères de Ploéal, inculpées de de vol d'ajoncs au préjudice de Le Goff, Yves-Marie, cultivateur au même lieu, ont été condamnée à 2 jours de prison, avec bénéfice de la loi Béranger, par la correctionnelle de Guingamp. — Un nommé Cueff, Joseph, marin de commerce à Saint-Pol-de-Léon, prévenu de filouterie d'aliments, au préjudice de plusieurs personnes de Ploéal, a été condamné à 3 jours de prison avec bénéfice de la loi Béranger par le même tribunal.